

YF_0134_Chanson Melani

Me 'zo 'hont da zisklêrian ur jañson a neve
Hag a zo bet kompozet gant den a galite

Nag un den a galite deus a ganton Kalleg
Hag a zo deut da noter da barrouz Melioneg

Mont 'ra da di 'wel't ur plac'h peta Gwendaol'Pellant
Met alles pete tal dañ pe ne n'ê ket d'hi c'hoant

An terruplañ plac'h yaouank 'ba' kartier Zant-Houarneo
Ur verc'hig da Varivon ha da baotr Kerio (Cariou)

Dre ur zulez d'apete 'haïes an den yaouank
Da gavet an Tomas koz 'balamour d'e verc'h koant

Bonsoar dac'h c'hwi Tomas koz, bonsoar dac'h a laran Koñje ho merc'h Melani diganeoc'h 'c'houlennan

Tomas koz 'n-eus respontet n'ê ket fachtet gant ze
Mag ê kontant Melani, ze 'vo gwelet goude

Bonjour dac'h Melani vihan, plac'hig joaüs ha gae
Pe on deut petak ho ti an devez a hirie

Me 'zo digaset amañ deus 'berz un aotrou mat
Da c'houlenn konsañtamant gant hoh mamm hag ho tad

'vit goulenn konsañtamant gant ho tad hag ho mamm
Met diganeoc'h Melani e c'houlennan da gentañ

Met diganeoc'h Melani e c'houlennan da gentañ
Gras ta deoc'h akordit din deus pezh a c'houlennan

Melani 'neus respontet d'an den yaouank treitour
Me ne ran ket kalz a gas 'vit gwel't ur gwenedour

Ur gwenedour n'eo ket mat 'met 'n ur pres alveiet
Hag alveio an tansor diganen a firet

Na pe vi't kaset d'ar park da labourat douar
ô neuzen 'ta Melani, c'hwi 'po keñv ha glac'har

C'hwi 'po keñv Melani vihan bezañ ma refuzet
Ka 'n aotrou deus Melioneg 'tay ket ken d'ho kwelet

Distroit 'ta den yaouank ha deuit war ho kiz
Ka re interes ho-peus, n'on ket 'vit ho refuz

An den yaouank 'es d'ar ger, e galon 'zo kontant
O tont d'annoñs e yelo d'an den chentil yaouank

Pa oa erru war e giz e-barz ti an aotrou
Peseurt mod emañ bet kont intre deoc'h c'hwi ho taou

Nag an traou a gerzas mat hag an dud zo kontant
'neus ket ken 'met ar re gozh 'vañkañ kavout arc'hant

Na fi ze med an aotrou, me 'meus finesti 'walc'h '(eme)
ma ne vank 'met an arc'hant, me 'vo dimêt d'ar plac'h...

Despudet genin 'ba 'ti Ujen Greunel 'Zin-Trefin 'pad miz Eost 1973, un nozez da goan e-kerz an Odise 'mamp grêt' sams
ga' Vas-Koat dre Minez Arr' ha Minez Du deuzalek Goareg beket Spei't.
E. Salaün 1993